

# Chanson ar Gwin ardant

VAR DON : *Ar Seiz skiant naturel*



1

Me o suppli Bretouned  
Da zilaou eur guir chanson  
A zo nevez compostet  
Var sujet ar boeson  
Kement den hen deuz skiant  
A breno ar gan ma  
Hag a raï d'ar gwin ardent  
Ar bresel ar gwassa

2

Ar gwin ardant da genta  
A vije implijet  
Da louzaouil loened klanv  
Ar zaout hag ar c'hezek  
Mes brem e ve lonket  
Gant kals evel souben  
Gant paotred ha gant plac'ched  
Evel lonka keuzien.

3

Klevet oc'h euz koulz a me  
Komz euz an droug heurio  
En em gav kazi bemde  
Goude re gorfado  
Ar boeson ez eo ar mamen  
An holl fallagriez  
Gwassoc'h eo vit ar vosen  
Hag evit a gernes.

4

Ar gwin ardant eo an dra  
A gas da berejo  
Muic'h vit ar c'holera  
Koulz ha da'r prisonio  
Brasa kriminel a zo  
E eo zur an alcool  
Kiriek eo d'ar priejo  
Alies d'en em goll.

5

Mil gwalheur d'ar paour kez den  
En em ro dan evach  
Rag'ne vo estimet ken  
Gant an dud a gourach  
Gwalgeurus eo he unan  
He vreg he vugale  
Ne gaz dei na dour na tan  
Nemert glac'har bemde

6

Pa oa Jakez paotr iaouank  
E rea promesaos  
Da Vonik e zouzik koant  
Manach kaer ha frico  
Monik ou en he galon  
Evel eur berlezen  
Ken a veraz ar poeson  
An alcool er weren.

7

Kenavo ta sonjou kaer  
Fin zo d'ar plijadur  
Jakez ne zeu ken d'ar ger  
Rentet eo ampfur  
Ha mar klem ar vreg brem  
Euz korfado Jakez  
E skoio e'hoas ar prei ma  
Taoliou bas ha boutes.

8

Lousoc'h eo eur pried meo  
Vit eur bouc'h difeson  
Skei e vreg chasa he bleo  
Pebeus loen direzon  
D'ar vreg ze e ve guelloc'h  
Kousket er galeo  
Pe gousket en touez ar moc'h  
Mui a beoc'h he devo.

13

Eur gwir Breton a zo goaz  
Kamez n'eo didalvez  
Galvet eo bet a viskoas  
Soudart vaillantive  
N'ez ben mert ar gwin ardant  
An alcool milliguet  
Hag a zouiil ebars er fang  
Enor ar Vretouned.

10

Areted holl tadou kez  
Mar zo goad n'ho galon  
Sonjat na tristan buez  
A rit soufr d'hoc'h itron  
Ha do pugaligou  
Roet deoch gant Doue  
Sonjat ezoc'h hoc'h unan  
Obliget d'ar re ze.

11

Heman zo eun abreje  
Euz buez eur rouleur  
Koll he gorf hag e ine  
Hag atao en mizer  
He vreg a zo merserez  
Hag he c'houadurien  
Setu aze ma zud kez  
Famil ar roulerien

12

Brema en euz kelou mad  
Evit an dud paour ze  
A beurs Doue hon guir dad  
Louzo vo evithe  
En bars en komzou Jesus  
Dre ar Speret Santel  
Eo iachet ar gwaleurus  
Oc'h c'heuil an Aviel.



F.-M. QUÉRÉ.

## Kousk Breiz-Izel

An heol à zo kuzet setu echu an de  
Me glev a c'hloc'h o tintal an Ave ;

### *DISKAN*

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,  
Setu an noz o tont var an douar  
Kousk, Breiz-Izel bro ker mad.  
Trouw ar mor vraz a zav d'az luskellat.

C'houez vad an ed e bleun hag al lan alaouret  
War ar mièziou gant ar gliz noz a red.

Ar bastored a gân, o testum o loened :  
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket koaz kollet.

En traoniennou didrous, me glev kân en eostig ;  
Teleunner noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz o skedi au nev steredennet  
A lar'zeus eun Doue ouz hor c'hat.

An neb a c'houez bembez a c'houinic e repos  
D'an dut vad Doue en deus great an noz

Arvor, ô douar sakr a greiz kalon m'ho kar,  
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar !

J. MARÉCHAL,